

Chanson
 Qi Person Lannilis.

(13)

Var ton: Me meus eur mab.

An oll, hervez an natur,
 Zo d'ar maro sujet;
 An Abostol, er Scritur,
 En deus se lavaret:
 Ar brincet, ar rouanes
 A bep oad, a bep bro,
 Chas ar bersonet memes
 Zo sujet d'ar maro.

A enep ur seurt lezen
 Pa n' eller rebarbi,
 Antron Person, birvigen
 N'em be gouelet d'ho qi,
 Ma vije e vajeste,
 Hep accidant funest,
 Decedet a glan-vele
 Evel an dud honest. (14)

Mes, pa ray attancion
 Var e varo mezus,
 E teu ar gompasion
 D'ober din gouela drus.
 Compos e epitafen
 Teir quech ameus sonjet,
 Ha eus va dorn ar bluen
 Teir quech a zo couezet.

Piou en divije, siouas!
 N'on pe zeis lavaret

E vije Finas geas
 Qer buan decedet?
 Mes ne get heur e varo
 An surpren c'hoas muya,
 Ar maleur eo divalo
 Zo erruet ganta.

Chas Dangloent, ar roue,
 Var rapport an histor,
 Qi manac'h Sant Roch ive (15)
 Zo maro gant eur.
 Biscoas qi var ar bed-mâ,
 Lennit, hac e velot,
 N'ey deus roet, evel emâ,
 E borplant ous ar rod.

Guir eo, Touign ha Moustafa,
 Dragon, Turc ha Moustach,
 N'o deus get gallet paqa
 Ar memes avantach:
 Darn anez, a glévân,
 Ouz ar groug zo marvet;
 Mes diouz ar rod dianân
 Int bet oll prezervet.

Qi Yam Flor'h, ar grougaden,
 Mit quech erminennet,
 Zo caos eus an obaden
 Pini zo arruet.

- (16) Oc'h heuill e dentasion
E lazgas anezã.
Pell zo, eme ar person,
Ab a vige dezã.
- Dre ar gasoni vortal
En devoa ous Finao,
En tãntas e groug-eal
Ar verza e voureo.
Ar gasoni a ziocar
Gement peñ mad zo 'r bed;
Dre 'r gasoni Jul-Cergar
E Rom a oue lazget.
- Bez eus un hostalini
E qichen an Ti-bras,
Eno e chom Yam Herry,
Hannet expert ar chas.
Ar Person er c'hemennas,
Arvout a ras ractal:
Anter-cant scoet er prizgas,
Ne get qer ar chatal.
- (17) E qever ar bêamant
E zeus savet proses.
Ar c'hi muntrer a bretant
N'ey deus get grêt expres.
Mes e faot a breuveunou
Eo risclus e affer:
Difen a ra 'l lezennou
Credi chas var o g'er.
- Duspen, hervez santimant
Ar brobabilistet,
Ei Yam Floch, certenmant,
E faot a zo sanset.
Un dra eas e da zantout:
N'oa get hep e zonzal
E teuas David da dizout
Goliath ey e dal.

- (18) Ledannoc'h eo goussoude
Un tãl evit ur rod;
Rêzon qi 'r Floch d'ar seurt-se,
A zo ur rêzon sot.
Affer all a zo savet,
Minoret eo ar chas,
Ha renk o c'hulatoret
Procedi ey o flas.
- En officialite,
Ar Person goulenner-
A erich gant gravite
Diouc'h ar Floch difenner,
Cant livr evit principal
Ha domach emerjant,
Ha pèvar scoet eiz real
Evit profit cessant.
- Ar action official
Evit caout connesans
Eus a vir pep aneval
Zo deut d'an odians.
An oll chas zo dilamet,
A c'hros evit selladou
(19) Hac eus dezp fourmisset
Act eub.o frezanchou.
- Etre chas an tierziou
Ha chas ar bersonet,
Balamour d'ar c'hadoriou,
Un daq a zo savet.
Gardim, evit o c'hanna,
A g'emmer ur pen bas,
Ha gant an dounger ounta
E rejont var ar plas.
- Ar chantre ey deveus collet
E c'hradus ey affer,
Hag ar Bernard e speret;
Ha La Mas e vrier;

8

Niget e bapilloton,
 Duqai e lorgnetes,
 Ha Yanniq Ksaliou
 E doq hag e vragerz.

Erfin, an Official
 Goude beza clêvet
 Procurorien ar chatal,
 (20) En deus bet ramvojet.
 Qi ar Flor'h zo criminal,
 Ha gemense zo caos
 N'el get an Iles sonjal
 Rei setans en e gos.

Ar c'hi ecclesiastiq
 A boursui e c'houlen,
 A zenous ar c'hi laiq
 Da justis Lesneven.
 Tud da destou zo deuet
 Var g'er ar senechal;
 Mes beza oant a spered
 Oll gerent d'ar chatal.

Ar Person, dre chanek Doue,
 En devoa gemennet
 Medecinnet ar c'hontre
 (21) Da gaout ar c'hi lazot,
 Gant urz d'en examina
 Hag a dreus hag a heol,
 Ha quelet hag en a voa
 Ar rod ampoezonet.

Var feis ar proces-verbal
 Eus ar vedecinnet,
 Procutor ar c'riminal
 A zo bet appointet
 Na da zouten e g'evren,
 Hervez an ordrenans,
 Pe en devije souden
 Var zefot ur setanz.

Avocat ar c'hi control
 Goas louen c'hoas evitâ,
 En deus product cant rol
 Da zouten anezâ,
 O supozî dre injiqn,
 Penaos qi 'r Goulenner
 En devoa clasqet isiqn
 (22) Ous qi an Difenner.

Setans interlocutor
 Rentet var an isiqn
 A gondaon an dau vinor
 Pephini d'e zispign.
 Evit triê'hi gemense,
 Ar Person en instant
 A zisclêry en e blede
 E g'i da inosant.

Ar senechal estonet
 O clêvet ur seurt tra,
 A lavaras e renqet
 Dig'erri anezâ
 Evit gout an assurans
 Dre lavaret moyen
 Ha quir voa en consians
 N'en doa get a empen.

Er bourg eus a Lammilis
 Ez eus ur c'houfe goullou,
 (23) Gant ar barossianis
 Hanvet an Archivou.
 Ennes a voa destinnet
 Da volz evit ar c'hi,
 Anezân e oue tennet
 Da gas da zig'eri.

Ur chirurgien touet
 A zo deuet d'al Sez,
 Ha pen ar c'hi digoret
 Gant un taol lansetoz.

Ar Person a voa prezant
 Arzet var ur scabel
 Hag e voe goelet patant
 N'en di'or get a zervel.

(24) Evel ma voe demonstret
 Voa sot ar peñ chatal,
 E voe souden revoget
 Setans ar Senechal;
 En e gouluzionou,
 Proculor ar roue
 A ro c'hoas e zuffrajou
 D'ar c'hi var g'emense.

Conseil an avocadet
 Eus a g'eer a Roazon
 A zo c'hoas en em gavet
 E faveur qi 'r Person;
 Rag ma c'arje, emezo,
 Ar Ro'h staga e g'i,
 Dibot e vije maïro
 Qi Person K'oppar.

Quir eo, qi ar Goulenner
 A voa ive distag;
 Mes ive ur c'hi chasseur
 Ne dle get beza stag;
 Ha m'ar difen ar C'honsil
 Awz b'eteg ar chasse,
 Digant ar justis civil
 En deus quir da vale.

(25) Leñ a reomp en ur bajen
 Eus ar Lyndrum ar Chas,
 Un artilcl hag a ordren
 Berc'hel stag ar re vras;
 Mes evit ar Barbedet,
 Evel qi ar Person,
 O deves quir da redeq
 En o discretion.

An artilcl - ma a gaver
 Er chabisti Nescio
 Pini zo tout e faveur
 Ar barbet Finas.
 Ha dre ar memes g'evren,
 Plint zo bras, pe n'int get,
 Mastinet ar v'elezen
 To privilegiet.

(26) Ar Banner, o rei setans
 Definitivamant,
 A chomas pell e balans
 Evit choas an tourmant.
 A la fin, evit asten
 D'ar muntrer e boanion,
 Evit tri bloas e'f' ordren
 E gas d'ar galeon.

Pa vezo deut an tri bloas
 E lammor anezã,
 Neuze e roi an oll chas
 O mallozjou dezã.
 Goude e vezo devet
 E prezans an oll bobl
 Evel al loen milliget
 Eus a Konstantinopl.

(27) En instant e voue coulmet
 Ous e c'har dez gorden,
 Hag ur c'holier rus stag'et
 Dezã en e g'erc'hen.
 Destumet eo er prizon
 Un nebeut da bleustri;
 Pa deui chadennou Roazon
 E partis ganti.

Evelse eo cunduet
 An avantur d'e fin.
 Ar c'har a vezo devet,
 Hervez lezen Merlin,

10

P'ini en deus ordrenet
 D'èvi 'n instrumanchou
 Pere o deus servichet
 E vit ober drougon.

Ar c'hroc'hen zo qivijet
 Ger gempenniq ha tra
 Ha gant an houarn skrivet
 A[r] setans varnezã.
 An arc'hant zo consignet
 En deouarn ar Grefrier,
 Hag an oll dle acquitët
 Var gont an Difenner.

Ous e fri ur rod canal
 A zo dezãn stag'et,
 M'or bezo ur zouch fidel
 Eus e varo bepret.
 E gorf a zo ambomet
 Divar goust an anaon;
 Hag en iliz affichet
 Azjouc'h pen Sant Anton.

Ur dez paper zo stag'et
 Azjouc'h bez ar c'hy,
 Ha gant pinturach skrivet
 A la gros varnezi:
 Qi Yan Plo'h, vade retrò,
 D'ho toul, chas dinèzon,
 Amàn ema Finao,
 Amàn mã Qi 'n Person.

An ilis m'em' an dra-mã
 A zo pense pel zo;
 Esper a zo er bla-mã
 M'ar g'eller, d'e golo.
 Gant Roascl, eus a Krasqer, (29)
 E tle beza taët,
 Hag ar c'hi, en ur baner,
 Doug'et e tra 'n vèred.

E Bro-Saor, eme 'n histor,
 Pel bloas ar vinistret
 A rent ar memes honor
 D'ur goz Durgez verglet,
 Gant p'ini quechal Dunstan,
 E vit el bunissa,
 A grogas e fri Satan
 A voa deut d'e denta.

Pa zai ar Person d'ar chasse,
 En deus quir da forci
 Ar Plo'h pe e vegale
 D'arzal e lec'h e gli.
 Mes pretant a ra Sorgant,
 Mar chasse ar Person,
 E roi urz da zovu zervant
 D'e blanta er prizon. (30)

Ar c'hi, var a leverer,
 A zo appariset
 Da c'hreg Yan, ar chareter,
 Noz Gouët-Yan dremenet,
 Var vantel ar chiminal,
 Azeget da repos,
 E lavaras, el leal,
 Eze d'e varados.

Beza zeus ur precipis
 Un tã var bord ar mor,
 El lec'h ma rê Sant Patris
 Credi ur purgator.
 Ar chas goen a zo brêmàn
 En arout-se o flas,
 Hag ar plas-se, a glèvan,
 Eo bariados ar chas.

Di e zay qi ar person,
 Da g'ichen qi lobi
 Ha qement qi a fèson
 O deus grèt evliti. (31)

En ul levr emeus lennet
Penaos Jan-Jacq Rousseau,
Mignon an anevalet
A yêlo di ganto.

An aotrou Anagon,
Er vizit diveza,
En deus roet permission
Verbalamant dezã
D'ober, mar g'ell, miracloù,
Hag a dreuz hag a hed
Da c'hortoz ar paperion
Zo dezãn prometet.

(32) Oremus ar c'hi maro
En e form a g'effot;
Ar hini el lavaro
Ne varro get dre 'n rod.
Evelse, poll ar c'harter,
Bemdez livrit-hi,
Gant aon, evel m'eus danjer,
N'o pe maro ar c'hi.

Ar Person en deus qerc'het
Ur peinter a bell bro,
Erit tenna e bortret
Conforma ma c'hello.
Ha c'houi, tud Sam-hep-ilis,
Regetit diganta
M'o pezo en o tivis
Peb a g'i divarnã.

Mes, petra lavaromp-ni?
Ne get echu ar stal;
Sonch zo da lagat terri
Ar proces criminal.
Appel zo signifiet
Dindan ar pempzec dez,
Ha qi 'n Person obliget
Da fledi a nevez.

(33) Qi 'n Flo'h er prison fourret,
Da c'hortoz ar chaden,
Goude beza ruminet
Cant affer en e beñ,
En deveus laget scriva
Da Lorgant, avocad,
Erit goulen diganta
Ur guzvil fall pe vad.

Lorgant en deus respontet
N'entent get ar chican;
Mes Riet en deus cavet
Ur rêzon qer buan.
Ne get e dalc'h ar roue
Eo decedet ar c'hi,
Ha n'ell get var g'emense
Lemmen e jiji.

E qichen ar presbital
E veler ur vañel,
A zepar an dalc'h royal
Diouc'h hini ar c'hastel.
(34) Etre 'n daou zalc'h dremanjant
Eo decedet ar c'hi,
Ha ne get, par conseqant,
Maro tout en hini.

Qi 'n Flo'h d'ar c'hi decedet
A ro appel hepquen,
Erit ma verzo torret
Tout ar broceduren.
Ar Person en diarben
Dirag ar parlamant,
Hag a brou voa Lemmen
En affer competant.

Dious ar peñ, var e veno,
E jujer ar chatal;
Peñ ar c'hi, pa zê maro,
A voa en dalc'h royal.

12

Rac se, evit caout testou
Hag ober pront ur fin,
Partout dre ar barosiou
Eus grêt son tabourin.

(35)

Den ebet ne zeus deuet
D'al lez da reveli
Balamour m'oant ramvojet
Evel qerent d'ar C'hi.
Deut eus escumunug'en,
Hervez ma main ar brud,
D'ar chas da vont da zouten,
Pa na zê deut an dud.

Hag a gleiz hag a zeo
Eus deut chas a vanden.
Ar c'hi besq eus a Vrenmo
Eo bet ar c'habiten.

Qi 'n aotrou Flo'h occupet
O leñ ur gonferans,
Er pasach a zo beuzet,
P'edo 'r rag oc'h avans.

Mastin Person Sandedda
En deus recevet urz
Da non pas apparisa,
Balamour d'an digurs
Da b'ini voa e danger
Da rei occasion,
Mar clasqe qer prest affer
Ha ma ra e berson.

(36)

Qi Loberz en deus caset
Ur reget en e blas;
An azen. ma a velet
Cals e beñ dreist ar chas.
Ur c'haz rouz a voa ganta
A zindan e gazel,
Hag a zerriche dezân
Da c'hoari ar viel.

Qi 'r person a Roug'erne,
Scotet tout e batou,
N'en deus qet gallet bale
Da vont d'an anquetou.
Oc'h antani e biben
D'e vesti, eo bet poazet;
Ur marc'h louach a g'ichen
En deus gantân casset.

(37)

Qi Trammerez evertiset
Da vont da reveli,
A laqas en e speret
Digas Rouzou d'e di.
Ar c'hi bail, a Tremenach,
Rac n'en dirije droug,
E zeas Catel gant ur sac'h
Da zoug'en ouz e choug.

Qi Lochrist, en en rentet
Da zelaou ar Person,
A voa savet ar stered
Pa zeuas eus ar sarmm.
Emân a voe divezat,
Qercouls ha Qi Morel.
Yan ar Dian zo eat
Elec'h qi Rouarzel.

(38)

Qi philozof ar Person
Demeus a Berzposter,
En interrogasion
Ne brigas respont g'er.
An argument, emezan,
N'en deo qet e form vad,
Hag e respont dezân
O rei un transeak.

An Dogez a Blouzane
Al loer en e gerc'hen
A antreprenas ive
Mont da heuil ar vanden.

- Mes un explet a l'empier
A voe dezân rentet,
Ha chetu eno 'n affer
En deusan distroet.
- (39) Qiez Person Treqlonou
Erruet e peñ e beach
Zo savet en angetton
Toulouet en he langach.
Qi ar Beraget erruet,
A grie dre 'r prênestr,
Biscoas len nèn doa quezet
Qen nebeut hag e vestr.
- A barres Loprénalar
Levren goz ar Person,
Hag ini 'n aotrou Accar
O deus expansion.
Ober a dle ar c'henta
Armoniou ar c'hi,
An eil, erit e visqa
A gas neud da steuni.
- Qi 'r Bleunnon, ar min sucret
O tont da giesse,
Etouez chas ar berzonet
Dre vanité a ya.
(40) Mes pa gléras e renget
Discléria 'r virionez,
Evel pa vije scotet
E tec'has eus al lez.
- E fait eus a gonfitur,
Qi Person Ledmenem
A zo bet tost da zansur
An escumunegen.
Qi Cas-neuf papillotet,
E lost en catogan,
Bleiz ar zarmoniou frippet
Zo bet eat evitan.
- Ar chatal, var a gléran;
N'o doa get tout quelet;
Mes bez' o doa, diana,
Tout clévet var glévet.
An aotrou Yvanama fachtet
Defot casut qi da gas,
En aon beza sansuret,
En deus caset e gas.
- (41) Tout o deveus ar chatal
Var o le asuret
Edo diouz ar presbital
Peñ ar c'hi decedet.
Hag evel ar prespital
Zo, hervez ar scrijou,
Situé en dalc'h royal,
Eo mad an afferou.
- Picot erit e g'enren
En deveus objectet
Penzas ur c'hi hep empen
N'en deveus peñ ebet.
Ha p'eo en dalc'h Yvanon
Edo pèn adre 'r c'hi,
E ro appel ar Person
Da zont di da bledi.
- Chetu aze 'r g'estion
Zo savet er proces;
Darn o deus ompinion
E chomo ouz an drez.
(42) Ha va Chanson e-unan,
Diouz ma vezo an dro,
E creis etre lost Satan
Hag e reor a chomo.
- Gant ur c'har d'ar c'hi lazet
Eo comoret ar zon,
Pini zo a gas rannet
Gant ar c'heus e galon.

14

Gouelit tout en ur vanden,
Pa lennot anezi ;
Me vouele quella m'allen
En ur e c'kompozi.

Laë, Avocat.

FIN

(Vol. I, p. 13-42)